

1

INOSANT !

Dihuniñ a ran. Ya, gouzout a ran : ne vez ket lavaret alies « dihuniñ a ran » gant an dud n'int ket inosanted anezho ! An dihun-mañ, avat, a zo a bouez e istor va buhez, setu perak. Klevout a ran ur bleiz o yudal er pelloù, pe en ur gwallhunvre, n'ouzon ket. Va daoulagad a zigor. Kelaouiñ a reont va c'horf ha va spered on-me gourvezet war va c'hein en ur gambr wenn. C'hwezh an eter a zo amañ ha n'eo ket na c'hwezh ar bezhin na c'hwezh an dour-hañvouez. N'emaon ket er gêr, emichañs ! Un dra bennak zo plantet 'barzh va brec'h, un duellenn blastik leun a lipig o tiskenn eus un doare logodenn-dall dreuzwelus a-ispilh ouzh ur walenn-besketa. Pelec'h emañ va lunedoù ? En ospital emeon, pa n'on ket marv. Ur bouton ruz war ur voestig a zo e-kichen va dorn, d'ober petra ? Da zigeriñ an nor ? Peseurt dor ? N'on ket evit pouezañ warnañ forzh penaos. N'on ket evit fiñval na va brec'h, na va daouarn, na va bizied, na va divesker, na va zreid.

Ken pounner hag ur valizenn-ruilh eo va fenn...
met soñj 'm eus eus pep tra : ar vugale, ar veaj, ar
freuz hag an distruj ! Ruilhal a ra ar malizennoù em
c'hlopenn pa zeu ar soñjoù-se em fenn.

Abaoe peur emañ en ospital-mañ ? Eurvezhioù ?
Devezhioù ? Mizvezhioù ? Pet eur eo ? Pelec'h emañ
ar bleizi a glevan ?

Gervel. Gervel unan bennak a rankan ober. Sec'h
eo va gourlañchenn. N'eo ket va genoù evit teurel
kalz sonioù. Ken prim eo va zeod hag ur valum
beñseet war an traezh. Un den bennak a zeuio da'm
gwelet poent pe boent, forzh penaos. Gortoz.

— Dihunet oc'h, Aotrou ? a glevan diwezhatoc'h.
Lakaat a ran beg va fri da horigellat un tamm.

— Petra eo ho anv ?

4 Ya, en ospital emañ, anat din. Seurt goulennoù
a zo langaj ar glañvdiourien pe langaj an archerien...
An archerien ! E c'hellfen bezañ erruet e klañvdi
un toull-bac'h, na petra ! Goude an torfed am eus
graet... Lakaat a ran ar valum da fiñval e-barzh va
genoù :

— I-nosant...

— Inosant, me ? C'hwi an hini eo ! E peseurt
bloavezh emañomp ?

— E daou vil u-nan warn-u-gent.

— E 2022 abaoe ar c'hentañ a viz Genver,
Aotrou ! Lavarit din piv eo prezidant ar republik...

— Chi-rac eo, Fañch Chi-rac...

— Inosant !

“Inosant” a vez graet ac’hanon. Abaoe tri-ugent vloaz bennak eo skrivet “Inosant” war gaieroù an aotrou maer hag an aotrou person. Ganet on bet d’un 28 a viz Kerzu evit plijout da’m zad. Eñ en doa bet c’hoant da gaout ur bugel ouzhpenn en tiegezh a-raok fin ar bloaz-hont, a-benn paeañ nebeutoc’h a dailhoù er bloavezh war-lerc’h. Ken laouen e oa bet o vont da relatiñ ar bugel nevez-c’hanet en ti-kêr, ken en doa disoñjet klask un anv-badez dereat dezhañ. Neuze eo bet lakaet din anv sant an devezh gant abostol an ti-kêr : Inosant ! Piv ’ta a oa bet an inosantañ en devezh-se, ’soñj deoc’h ?

E peseurt stad emeon hiziv ? E peseurt stad emañ va c’horf ? Bloñset, gloazet, brevet, devet ha mac’hagnet marteze. E peseurt stad emañ va ene ?

Tremen a ra an amzer, goustad. Pegeit zo emeon amañ ? N’ouzon ket ! Bremañ e vez lusket va buhez gant daou brantad : an noz hag an deiz. E-pad an noz ne welan nemet gwad o teverañ ouzh ar prenestr, ne glevan nemet bleizi o yudal tro-dro din, ha ne zeu james den ebet da’m frealziñ e-pad va gwallhunvreoù. E-pad an deiz ne welan nemet tud an ospital. E glas-sklaer int gwisket. Demata a reont ac’hanon a-bell, ha sellet pizh ouzhin evel pa vijen danvez tarz. N’eus den ebet all o vizitañ ac’hanon. Peseurt den kar, peseurt mignon a gredfe dont da welet ur pennsod evel don ? Unan eus ar re a welan

bemdez, avat, a zo gwisket e gwenn : ar medisin eo. Rust eo ar paotr. Tamm salud ebet digantañ. Profesor Abrantius ne goll ket kalz a amzer ganin. Magañ a ra kasoni ouzhin, am eus aon.

— Serrit ho torn, stardit mort ! emezañ.

Dont a ran a-benn da lakaat va bizied da grenañ.

— Mat ! E c'helloc'h bezañ maget. Roit yod avaloù dezhañ. Yod avaloù a gavit mat ?

Na 'm bez ket amzer da respont. Aet eo kuit dija, e lez d'e heul.

Ket. Ne gavan ket mat yod avaloù, nag evit-se... Un dudi eo al loaiad vihan gentañ ledet war va zeod gwenn.

Bennozh Doue deoc'h !

Ur blaz saourus n'ankounac'hain biken. Va meuz kentañ abaoe ar veaj villiget en Euskadi...

Kentaou, me 'soñj din e oa er mintin-mañ, ez eus deuet ur vaouez da welet ac'hanon. Homañ gwisket evel un dudenn eus va buhez a-ziaraok ! Hep saro en-dro dezhi, met ganti ur chupenn lêr hag un jean.

— Ensellerez Hamiltona Murnau, emezi buan ha fraezh en ur vont tre.

Strapañ a ra un nor war he lerc'h. Echu gant ar gourc'hemennoù. Ur penn a zo outi ! Ar boliserez-mañ n'eo ket deuet da c'hoari domino ganin, anat.

— Ar polis ? Inosant on-me...

— Inosant ?

— Graet e vez Inosant diouzhin. M'en tou ! Edon o c'hortoz ac'hanoc'h, Ensellerez, kalz a draoù am eus da gontañ deoc'h, a ouzhpennan chuchumuchu en ur glask mousc'hoarzhin.

Hi, avat, ne vousec'hoarzh ket, ha padal ne gavan ket anezhi displijus. Inosant eus ar c'hantved all ma 'z on, e kreden e vije deuet ur poliser kozh eus ur post-tele e gwenn ha du, unan heñvel ouzh Bruno Cremer, Jean Richard pe Jean Gabin zoken da atersiñ ac'hanon. N'eo ket, an ensellerez Hamiltona, mantell-c'hlav louet ebet en-dro dezhi na gorn-butun en he beg, a dro va c'halon a-du ganti. Hi dirazon, yaouank ha koantik, leun a startijenn. Me, paourkaezh paotr kozh, seizet marv va izili hag all.

— Ho testeni am eus ezhomm diwar ar gwallzarvoud, emezi.

— Bennozh Doue deoc'h !

— Petra a lavarit ?

— C'hwi zo kenkoulz hag ul loaiaid yod avaloù.

Hag ar boliserez, chomet war he souezh, ha c'hoarzhin a galon vat.

Sed amañ peseurt mod e krogan gant dezrevell va marvailhoù. Poan a ra ar gerioù din e foñs va c'horzailhenn verglet c'hoazh. Ur banne bier a ziverglfe anezhi moarvat. Setu ul louzoù na vez ket roet en ospital-mañ, siwazh. Lakaat a ra Hamiltona he enroller da labourat :

— Komañs a reas an avantur e miz Kerzu tremenet, ma 'm eus soñj mat, a gontan d'an enselle-rez...

Vakañsoù an Nedeleg a zo, evit lod. Met evidon n'eo ket ! Emaon oc'h evañ ur banne kafe e "ostaleri al Labous-mor" a-raok kregiñ gant va zroiad :

— Ac'hanta Inosant, te o kafeta d'an eur-mañ ! War da leve emañ ? a huch ur vouezh anavezet ganin, pouez-mouezh Londrez ganti : hini va c'hamalad Poupou eo, kelenner sport diouzh e vicher, Doue d'e bardono !

— N'emaon ket c'hoazh, alato ! Un trimiziad a chom din d'ober war al linenn 20... ha da c'houde e vin evit c'hoari bagig etre ar C'horejoù hag enez Stagadon !

— N'out ket skuizh gant da linenn 20 ? Ouzhpenn an D13 a zo war an douar-patatez-mañ ! Ma fell dit foetañ bro un tammig c'hoazh a-raok ar retred e kinnigan dit bale ur c'hlasad skolidi e Bro-Euskadi e miz Meurzh. Ur c'hlasad eus Donostia hon eus degemeret e miz Here. Deomp-ni bremañ da vont da welet anezho du-hont. Propoc'h e vefe dit echuiñ da amzer-bleiner ganeomp, war an hentoù bras... Te zo barrek evit seurt beajoù, abaoe ar geid ! Ne vi ket enoet gant ar c'hlasad-se, a lavaran dit !

Sur, n'on ket bet enoet ! Ma vefen bet ne vefen ket seizet war ur gwele-ospital hiziv.

— Bugale ho peus ? a c'houlenner gant an ensellerez.

— Kendalc'hit ! a respont Hamiltona, sec'h-krenn he ger.

Un nebeud devezhioù goude ez eus bet prientet un emgav e sal vras ar gompagnunezh “kirri-boutin Kilimadeg” gant Madeg, va rener, hini Skolaj an Traezh ruz, ar gelennerien a aoz ar veaj, ha me, ar bleiner lakaet youlek war ar raktres-se.

— Neuze ! Emaomp amañ evit pourchas ur veaj da Vro-Euskadi, eus al Lun 9 betek ar Gwener 13 a viz Meurzh evit un tregont bennak a vugale ha pevar den gour evit ober war o zro. Ul listenn a zo amañ ganin : Dolores, kelenner war ar c'hastilhaneg, Gwadeg, rener ha penngelenner, Pouliken, kelenner war ar saozneg hag ar sport, ha Spontana, kasourez. Ar c'harr-boutin a ranko loc'hañ al Lun 9 da 7 eur rik diouzh ar mintin eus parkva ar skolaj. Gwazh d'ar re a vo dale ganto : ne vint ket gortozet gant Inosant hag a vo ho plenier nemetañ. Ehanoù ret a vo d'ober pep peder eurvezh hanter hervez al lezenn, gouzout a rit. Ne viot ket erru e Donostia eta a-raok 9 eur noz... Diouzh noz e vo graet ar veaj all. Distro d'ar gêr d'ar Gwener 13, ma n'ho pevez ket aon rak an devezh-se !

— Devezh va retred e vo emichañs ! a droc'han.

— Hag e c'hellan kenderc'hel mar plij, Inosant ? Ret e vo dit mont betek penn gant ar veaj memestra.

Pep hini a ranko kaout e baperioù gantañ : kartenn-anv, aotre da guitaat ar vro hag...

— Hag e dorr-naon evel-just, eme Boupou, bir-vidik. Ha plas a vo er c'houfr evit va marc'h-houarn ?

— Kavet 'vo ur plas evitañ, emichañs, emeve. Met ne vo ket plas evit tri pe bevar nag evit ur piano ouzhpenn, na petra !

— Aet oc'h war gomz an aotrou Madeg adarre, paotred, 'm eus aon ! eme Wadeg...

— Dav eo din menegiñ eo Daemon Pouliken, pe “e oa” kentoc'h, ur paotr hanter-Saoz hag hanter-sot gant e velo ! Ur c'hourser e oa bet pa oa yaouank, a-raok e wallzarvoud war ar Pariz-Roubaix. Echu ar podiomoù gantañ, eo aet da gelenner e Breizh ha kendalc'het da ziduañ e amzer gant e varc'h-houarn, puchet warnañ un eurvezh pe ziv bemdez. Setu perak e vez lesanvet “Poupou” gant an holl... e doare ma vez graet eus Raymond Poulidor, ur c'hourser deuet-mat hanter-kant vloaz zo.

— Peseurt klasad a zo da gas da Euskadi ? a c'houlennan gantañ diwezhatoc'h.

— *Well !* a respont Poupou, lakaet diaes. Amañ emañ an dalc'h ! Gouzout a rez e vez roet anvioù da bep klasad en hor skolaj : 6^{vet} gwenn ha 6^{vet} du, 5^{vet} kig ha 5^{vet} fars, 4^{re} Eusa ha 4^{re} Molenez... ar re-se eo an 3^{de} erminig, sañset, met graet 'vez 3^{de} torr-revr anezho gant ar skipailh pedagogel ! Abaoe m'emaon o labourat er skolaj, ne 'm eus ket bet tro d'ober war-dro kalz a vugale diaes. Bez' e tegemeromp

unan pe zaou bep bloaz... ha c'hoazh ! Ar c'hlasad-mañ zo disheñvel-krenn diouzh ar re all... *My god !* Hennezh zo un dastumad eus ar re nullañ.

— Diaezamantoù o devez er skol ? Seurt traoù a c'hoarvez alies, siwazh ! emeve.

— Evel-just ! Lezirek int, met ouzhpenn-se ne 'm eus gwelet biskoazh skolajidi na ken feuls, na ken drouk, na ken imobil, na ken dihegar hag ar re-mañ.

— Mont a rez re bell ganti !

— Gwashoc'h zo : n'eus hini ebet anezho evit intent petra eo ar vignoniezh pe ar garantez ouzh an nesañ. Digalon int holl, 'm eus aon. Didalvoudoc'h egeto n'eus ket ! N'eo ket un digarez da nullañ ar veaj, siwazh... Petra a soñjfe ar gerent ?

— An istrogelled-se eo a rankin pourmen en tu all d'ar Pireneoù ?

— *Yes, Sir.* Ur sizhunvezh nemetken e rankite gouzañv anezho. Me a ranko gortoz betek miz Gouere ! Deomp-ni d'ober hor seizh gwellañ evit kavout ur skol all da bep hini anezho, en em zizober diouto, ha n'eo ket o lakaat da eilañ amañ. Trawalc'h ganto ! Ur wech distlabezet diouzh ar vorjined-se e vo aozet ur fest evit hon dieubidigezh, ha te vo pedet da zont ivez !

— Bugale ho peus, Hamiltona ?

Ober a ra ar boliserez ur pleg d'he fenn.

— Karantez ho peus outo ?

Ur pleg d'he fenn adarre.

— N'edont ket e-touez ar re-se moarvat ?

— 'Oant ket ! Kontit ar veaj din, mar plij !

D'al Lun 9 a viz Meurzh da 6e15 diouzh ar mintin ez erruan war parkva Skolaj an Traezh ruz, ouzh rod-stur ur c'harr-boutin nevez-flamm, unan brav, a-liv gant an ifern, aes eston hag asuret mat... Gwell a-se, rak un hantereur diwezhatoc'h eo brevet gwerenn ur gouloù-latar dija gant ur maen bannet gant n'ouzon ket piv : teñval eo an noz c'hoazh ha sklêrijennet fall ar parkva. Reiñ a ra Spontana un taol c'hwitell pe zaou da glevet ha setu an tropellad lanfreidi bodet dirak ar c'harr-boutin evel leueoù bloaz o vont d'al lazhti. Tro 'm eus neuze da welet anezho a-dost, a-drugarez da c'houleier ar c'harr-boutin. Kaer 'm eus sellet outo, unan-hag-unan, ne welan nemet fasoù divalav o c'henaouegiñ, daoulagadoù touseg ha divjodoù burbuennek outo... krennarded speredet berr dilezet gant ar c'hras hag ar goantiz, achapet kuit eus "Lez ar burzhudoù" bet taolennet gant Victor Hugo.

— Lennet ho peus *Itron Varia Pariz*, Hamiltona ?

« C'hoarzhadennoù skiltr, yudadennoù a vez klevet. Trolinennoù daouarnioù ha pennoù a vez merzet oc'h ober mil jestr iskis. Chas heñvel ouzh tud ha tud heñvel ouzh chas a vez gwelet war al leur, e-touez ar skeudoù displann. Emañ marteze harzoù etre ar gouennoù o vont diwar wel... »